

# AL LANV

TORREY CANYON  
OLYMPIC BRAVERY  
BOEHLEN

AMOCO CADIZ

GINO

TANIO

HA PLOGO OUZHPENN

NIVERENN 2      6 LUR  
MEURZH.EBREL 1980

## pennad-stur

Trugarez a lavaromp da gentañ d'ar re o deus komanantet ha dre se fiziet enomp o gwenneien da c'hellout mont pelloc'h. 120 komananter bennak a zo ganeomp bremañ ha gant an disterañ striv a-berzh ar vrezhonegerien kar-o-yezh e c'hellfemp mont en tu-hont da 500 a-benn fin ar bloaz.

Gant an niverenn gentañ ez eus deut deomp burutelladennoù a bep seurt, ha gwell-a-se. Ret eo magañ an diviz evit mont war-raok. Magañ an diviz a lavaromp ha n'eo ket trenkañ ar soubenp gant pismigadennoù dister : pa varner e tleer barn war al labour a-bezh ha n'eo ket abegiañ war munudachoù yezh h. a. e-giz ma ra a galon laouen hon fismigerien touet. Ne respontimp ket dezho.

D'an tamalloù siriusoc'h e respontimp avat. Ur gelaouenn savet en ur yezh lennegel e vefe hon hini ha dao dei gant ar c'holvazh ! Gwir eo omp mennet d'ober gant gerioù brezhonek pa vez anezho, d'ober gant troioù-lavar pe da grouñf pozioù nevez da respont ouzh ezhommoù nevez. Gwir eo ne fell ket deomp tremen dre ar galleg war-zigarez ma vefe intentet gwelloc'h gant an dud... Arabat, d'hor meno, bastardif pelloc'h hor yezh, mastaret-awalc'h e vez evelse gant ar galleg, er c'hontrol e tle ar paper moulet servij da wellaat yezh al lenneerien e-giz ma tlefe wellaat ar radio hag ar skinwel hini o selaouerien... Dibaboù diazez a zo ganeomp e-keñver doare-skrivañ, e peurunvan e vo penn-da-benn, e-keñver yezh e klaskimp ober gant ul lavar arnevez ha gwevn, ennañ perzhioù gwellañ hor yezh. Gwazh-a-se evit ar re a gav dezho e tle chom ar brezhoneg yezh an naontekvet kantved gall war-arnaez pe war vor, bez hon eus ni un he-rezh divent da samañ, da arat ha da binvidikaat. N'eus ket gwiskadoù yezh amañ hag ahont, bez zo ur yezh enni perzhioù dibar ar yezh kozh, parlantoù birvidik a-vremañ ha p'leze ar yezh lennegel arnevez.

Evit ar "magazin" bremañ n'omp ket a-du kennebeut. Dreist-holl gant an isster a roer d'ar ger-mañ, ur gelaouenn a vefe un dra bennak dudius hogen diret, enni a bep seurt danvezioù o tennañ da wiskadoù liesseurt ar vuhez. Ganeomp avat ez eus ul liamm, ur pal boutin e frammadur ar gelaouenn hag en heuliañ ar pennadoù. Politikerezh

diavez, diabarzh, sevenadur h. a. a zo liammet da vat evit kinnig ul linenn sokialour ha breizhek d'al lenneerien.

Dezho ivez d'ober o mad eus ar gelaouenn en ur vurutellañ hor mennozioù, en ur gas kemenoù deomp pe en ur gemer perzh en divizoù a vo digoret el leurrennoù-komz evel an hini a vo savet adalek an niverenn a zeu war ar c'hinnigoù stourm da adlakaat hon yezh en he flom. Dezzannoù ha kinnigoù a vo degaset ganeomp kement ha boulc'hañ an dorzh, deoc'h ivez da fardañ pennadoù war an danvez-mañ eta "Penaos saveteif hor yezh ?" ha da gas anezho deomp.

Bezañ ul leurenn-gomz d'ar stourmerien arakour, ur benveg stummadur ha preder diwar-benn politikerezh ha sevenadur a-vremañ, setu pal AL LANV, hini ur wir gelaouenn he deus ezhomm anezhi an danvez-pobl o tihuniñ e Breizh.

## AL LANV 2 TAOLENN

- P. 2 PENNIAD-STUR
- P. 3 EUSKADI
- P. 4 War-lerc'h TITO...
- P. 6 KEMBRE
- P. 7 Dre nerzh al lany
- P. 10 IWERZHON
- P. 12 AN TANIO
- P. 15 PLOGO
- P. 16 Skol Diwan an Oriant
- P. 18 Indianed ar C'hebek
- P. 22 SONEREZH
- P. 23 Gerioù-kroaz

## estrenvro

### euskadi

Goude ar referendom war an emrenerezh evit teir eus ar peder proviñs Euskarek en tu all d'ar Pireneoù, setu ar vouezhiadeg diabarzh kentañ da zilinenn kannaded nevez Euskadi. Gant ar P. N. V. (strollad broadel Euskadi) eo aet an trec'h bras, gant 25 sez diwar 60, an talbennoù Euskarek ivez o deus graet berzh gant 11 sez evit HERRI BATASUNA (tost ouzh an E. T. A. militar) ha 6 evit Euskadiko Ezkerra (tu kleiz Euskarek, tost ouzh an E. T. A. politiko-militar). Ur gwall daol eta evit ar strolladoù bras spagnolek evel ar strollad sokialour (9 sez evit ar P. S. O. E.), 6 da dalbenn ar gouarnamant, 2 d'an Emglev Poblek (tu dehou pellañ) hag unan d'ar P. C.

Kement-se a ziskouez splann ma oa ezhomm c'hoazh n'eo ket diskekaret Euskariz gant 40 vloavezh a Frankouriezh, a faskouriezh, a voueviezh, a waskerezh stadel. Bev eo Euskadi korf hag ene, ha lañs zo gant an Iskatolok dre ar vro a-bezh. 53 722 bugel a zaremprede ar skolioù Euskarek warlene, bremañ emaint o krefivaat ar c'hentañ dezh, e-ser sevel an eil ha prest e vefe da zigeriñ ur skol-veur holleuskarek. Ar vicherourien deut eus Kastilha pe Andalousia a ya bremañ d'ober ar muiañ-niver eus ar renkad micherour en Euskadi, el labouradegoù dir, er chantieroù a vor hag all... Int-i a vot abertzale (brogar) hag a gas o bugale d'ar skolioù Euskarek Iskatolok (o skolioù diwan dezho). Disrannadus eo e Bro-Euskadi ar stourm dieubiñ broadel diouzh ar stourm evit ar sokialouriezh abalamour da bouez ar renkad micherour en he strolladoù. Rannet eo avat an nerzhioù-pobl dirak an emzalc'h a zo da gaout e-keñver statud emrenerezh Euskadi (anvet statud Guernica). Diouzh un tu ar P. N. V., demokratel-kristen, strollad an iliz Euskarek, en deus lakaet mouezhiañ a-du gant ar brizh-statud-se. Dre se e tegaset miliadoù a votadennoù brogar d'ar voue'hizelezh Spagnolek a zo gwell dezhi kaout un urzh euskarek ha kevalour en Euskadi e stern ar stad Spagnat eget ur vro dizalc'h o tilemel diganto o gounidoù

euzhus. An darn vrasañ eus ar strolladoù politikel all zo savet ivez a-du gant an emrenerezh e-giz ma oa kinniget evit degas ar peoc'h d'ar vro. Tu an E. T. A. militar avat, K. A. S. (emglev sokialour brogar) hag HERRI BATASUNA o deus distaolet statud emrenerezh Euskadi. Votet eo bet memestra ar statud ha bremañ dilennet ar kannaded ; n'eus tra diskoùmet koulskoude rak kenderc'hel a ra ar stourm armet renet gant an E. T. A. militar ouzh an nerzhioù gwaskerezh er vro. An E. T. A. poli-mili (marksour) en doa klasket ivez adluskañ ar stourm armet evit adc'hounit brud en he stourm a-enep an douristezh en hafv tremenet. Amañ e ranke, a-benn kompren un dra bennak, kounaet he doa tapet an E. T. A. mili ur pezh brud er vro gant gwall daol Carrero BLANCO, hag e tiskenn allies ar voc'hoù e straedoù kêrioù brasañ ar vro en ur huchal sloganoù e-giz ar re-mañ : "E.T.A. tap krog ez min-drailhetez", pe "E.T.A., plastikit ar greizenn". An E.T.A. poli-mili, dilezet tamm-pe-damm tachenn an armoù ganti a-baoe ur pennad, he doa fellet dezhi lakaat ar Stad spagnat da blegañ war un nebeut poentoù (distro d'ar vro prizoni-d Soria ha distaoliadeg evit an holl), en aner avat.

An E.T.A. militar a seblant bezañ mennet da genderc'hel gant he zagadennoù a-enep ar guardia civil hag ar bolis armet. Prientiñ a ra un enep-raktres anvet E.H.B.N. (Euskal Herriko Batzarre Nazional) gant hec'h askell bolitikel : HERRI BATASUNA, aozadur ennañ meur a strollad c'hoazh, eus ar strolladoù K. A. S. da gomiteoù stourm ar c'harterioù, d'ar re enep-nukleel pe 'vit an distaoliadeg... Gwiziennet-don e-mesk ar bolis Euskarek, e tale'hint da stourm a-benn tizhout ar frankiz broadel ha sokial evit Euskadi.

Emañ ar P. N. V. bremañ o klask en emglevout gant an E. T. A. militar evit kaout un harz-brezeil. A bouez bras eo d'ar gouarnamant, d'ar renkad ren bourc'hiz modernet dere'hel en he dorn nerzh pennañ Euskadi pa ya war gozhañ niver kannaded ar gouarnamant ha pa zihun an tu dehou pellañ, strollad nevez Frankour Frañq Iribarne...

## war Ierc'h Tito ...

War e dalaroù emañ TITO abace sizhun-vezhioù hir ha, daoust ma klask ar vesined e lakaat da badout par ma c'hellont, ez eo anat d'ar bed a-bezh eo echu gant ur ramz istorel all hag eo poent sellout ouzh an dazont. Teurel a raimp ur sell amañ war oberoù TITO, liesvroadelezh Yougoslavia, ha war an emvererezh<sup>2</sup> sokialour.

Mab labourerien-douar Kroatat eo TITO, stummet eo bet gant al luskad micherour Aostrian en e yaouankiz, ha goude gant ar strollad Bolchevik e-pad an dispac'h hag ar brezel diabarzh. Er stourm ouzh an diktat Stalinour, aozañ stummoù galloud disheñvel diouzh re an U.R.S.S. Dav eo bet dezhañ, diwar ur stummadur sokial-demokratel koulz ha Leninour, boulc'hañ un erv nevez a c'hellfe kas d'ar sokialouriezh. Dindan peseurt divizoù avat, hag e peseurt bro e voe krouet an emvererezh-se ?

Ur vro o terc'hel taer d'he dizalc'h-ted eo Yougoslavia, se zo kaoz en em savas en he fezh a-enep politikerezh diktaturel STALIN evit sevel o sokialouriezh dezho o-unan. Ur vro greñv ha war-un-dro rannet etre meur a bobl hag a vroadelezh. Bout zo enni c'hwec'h republik, div rannvro emren ha teir relijion. Dalc'het e vezont asambles en ur Stad gevredel<sup>3</sup> hag en ur gevredigezh liesvroadel emveret.

Daoust ma klasker kompezañ an diforc'hioù armerzhel<sup>4</sup> a zo etre an toleadoù n'eo ket tamm ebet heñvel o fouezioù armerzhel. Lec'hioù 'zo o deus ur mell spleet en abeg da gaerder ar vro, la-kaomp : evel aod Adriatek Bro-Groatia, pe tolead al lennoù hag ar c'hoadoù e Slovenia. N'eo ket heñvel kennebeut nerzh ar vroadelezhioù diouzh an toleadoù; al lusk d'an emvererezh pe d'an disrannouriezh<sup>5</sup> a zo en e greñvañ e Kroatia, e Masedonia hag e rannvro Kosovo ma vez ur milion a Albaniz o chom enni. Gant yezhoù disheñvel, broadoù diforc'h ha relijionoù disheñvel ivez, e chom unvan Yougoslavia memestra dre-benn da zaoz nerzh dreist-holl : hini kevrec'h<sup>6</sup> ar gommourien Yougoslavek hag hini an arme.

An hini kentañ a laka an traoù "en o reizh" dre urzhioù ar renerien greiz kerken ha ma sav dafjez evit unelezh ar vro. Bez 'zo koulskoude e pep republik ur c'hevre komnour emren hag a-wechoù tost dizalc'h, evel e Kroatia pe e Serbia. An eil, an arme, a zo anezhañ kreizmetañ aozadur ar vro. Ouzh an arme greizennet-se, embreget mat ha pourvezet a armoù soviedel dreist-holl, e vez staget ar milisoù pobl a zo enno kement gwaz ha maouez gouest d'en em gannañ. An armoù zo berniet e savadurioù ar parrezioù pe fiziet en dud o-unan. Kreñv-tre en emskiant broadel eo hengoun ar brezel kuzh renet ouzh an Italianed hag an alamaned. Ma teufe d'ar vro bout aloubet en-dro, en em savfe kerken ar bobl a-bezh, daoust d'hec'h armoù dister, da zisteurel ar yev. Yougoslavia a glask eta kempoezañ etre ar frankiz diabarzh hag an unvaniezh ret da dalañ ouzh an dafjezioù diavaez. Chom a ra unanet ivez dre ar c'hemmeskaj a orinoù a zo e-touesk he renerien : reoù ar C'Hevre Komnour, TITO, hanter-Slovenad, hanter-Groatad; BAKARITCH, Kroatad; KARDELJ, Slovenad. N'eus ket kalz a Serbed e penn ar Stad. Rener ar Stad a zo Masedonian, hini ar Strollad a zeu eus Voivodina, proviñs Serbek emren. Renet eo an arme war-un-dro gant Serbed ha Bosniaked, ar Gannadouriezh<sup>7</sup> gant ur Serbad, eviti da vodañ enni tud a bep orin.

War ar poent-se ivez ez eus un diforc'h etre Yougoslavia hag U.R.S.S., disheñvel eo o folitikerezh e-keñver ar pobloù bihan. En U.R.S.S. e vez kaset war-raok ar rusianekadur, ar vroad rusian eo a vez o ren, ha pouez ar mere-rezh hag e yezh a implijer da rusianekaat republik gevredel Rusia koulz hag ar republikoù bihanniverel. Diouzh tu Yougoslavia, eo bet laosket a goster ar soñj kozh da vodañ er memes republik Serbia, Montenegro ha Bosnia a-benn kaout ar muiañ-niver er gevredad<sup>8</sup>.

### Hag an emvererezh ?

Deut eo koulz lavarout gant ar stourm-harz ouzh diktaturel STALIN. Ret eo bet en em droc'hañ diouzh Moskou, pel-laot dioutañ, hag evit hen ober e voe

ret da renerezh Yougoslavia kemer harp war ar yoc'hoù<sup>9</sup>, ijinañ stummoù galloud nevez, ha reiñ muoc'h a frankiz broadel ha sokial d'ar pobloù.

Adalek 1950 e klasker diorren an emvererezh. Diazezet eo war geal Marks : emvennadur al labourerien<sup>10</sup>, e bal tremen d'ar sokialouriezh dre ar frankiz. Tamm-ha-tamm en deus an doare bevañ ha kenderc'hañ<sup>11</sup> nevez-se gouezet tachenn betek dont da vezañ hini ar gevredigezh a-bezh. N'eo ket bet diskoilh an hent evel just, ha meur a daol kempenn a zo bet hag a vo c'hoazh. Diaes eo lakaat ar vicherourien deut a-ziwar ar maez d'en em verañ da skouer. Trawalc'h e vez dezho evezhiañ war an aozioù-labour<sup>12</sup> ar goprou hag ar servijoù sokial, ar pennoù-etre<sup>13</sup> a ra war-dro ar renadur armerzhel en ur soñjal enno o-unan da gentañ, evel rezon. Hogen, muoc'h-mui e kemer pouez kannaded ar vicherourien er postoù-ren. Gwad nevez, ha skiant-prenet e lec'h all, zo deut ivez gant ar vicherourien distro eus broioù all Europa e lec'h ma labourerent. Klask a reer pellaat diouzh ar skouer gevalour<sup>14</sup> ha diouzh hini ar raktresoù bras, pounner ha mougus e-giz re Voskou. Keveze-rezh zo etre an unvezioù-kenderc'hañ<sup>15</sup>, daoust ma ne laosker ket lezennoù ar marc'had da ren penn-da-benn; rankout a reer doujañ ivez d'ar raktres, heblekoc'h, gwir eo, eget hini Moskou. Atav e chom mestr ar C'Hevre Komnour war an divizoù, en armerzh dre vras ha war ar vuhez politikel, met santet e vez ur frankizadur<sup>16</sup>. Meur a duegezh a zo bre-mañ er c'hevredad sokialour, meur a gannad zoken en anv ar C'Hevre Komnour daoust ma n'eus ket anv da zont d'al liesstrolladeged<sup>17</sup> evit ar mare.

Ur vro dibar eo eta Yougoslavia, ken e-keñver politikerezh diabarzh hag armerzh, ken e-keñver politikerezh etrevroadel. Bevañ hep bezañ lonket na gant an eil bloc'h na gant egile, na gant Moskou na gant tonton SAM, setu he redi. Unan eus izili oberiantañ ar broioù disteudet<sup>18</sup> eo Yougoslavia, loveañ a ra etre bleizi bras ar bed. Tostaat ouzh Pekin, en em glevout mat gant Italia

ha Gres, adskoulmañ darempredoù gant Albania, setu un nebeut skouerioù eus politikerezh diavaez ur vro hag a lavar nann d'ar gevalouriezh koulz ha d'ar sokialouriezh-stad...

### gerioù diaes

emvererezh -ioù a.b.gour., autogestion  
kevredel a.g., fédératif  
armerzhel a.g., économique  
disrannouriezh a.b.ben., séparatisme  
kevredad -où a.b.gour., ligue  
kannadouriezh -ioù a.b.ben., diplomatie  
kevredad -où a.b.gour., alliance  
yoc'h -où a.b.ben., masse  
emvennadur al labourerien, autodétermination des travailleurs (Marks)  
kenderc'hañ verb, produire  
aozioù-labour, conditions de travail  
ar pennoù-etre, les cadres  
kevalour a.g., capitaliste  
unvezioù-kenderc'hañ, unités de production  
frankizadur a.g.gour., libéralisation  
miesstrolladeged a.b.ben., multipartitisme  
disteudet verb, se désaligner

AN HABASK

### AL LANV

Kelaouenn diskleriet hervez lezenn ebrel 80

Moulet e Bretagne Ateliers, 146. st. An Oriant, ROAZHON  
Rener : Padrig An Habask

Koumanantoù : - 30 lur (boutin)  
- 50 lur (skoazel!)

Da :  
AL LANV, 7 st. ar rektor P. Henry, 35000 ROAZHON.

## kembre

E penn-kentañ miz Kerzu, e voe devet daou di-hañv e Dyfed. Abaoe an ti kentañ bet losket, eo pelloc'h tost da 20 a zo bet devet dre Gembre a-bezh. Ar re-mañ zo tuez ne vev enno o fer-c'henned nemet un nebeut sizhunvezhioù e-pad an hañv pe un nebeut dibennoù-sizhun e-pad ar goañv. Pelloc'h ez eus ouzhpenn 20 000 a diez-hañv e Kembre. An dra-se en deus ul levezon spontus war stad ar gevredigezh war ar maez.

E Llangrannog, e-kichen Aberteifi, ne vez tud o vevañ nemet e 40 ti diwar 120 e-pad ar goañv, ar peurrest zo tuez-hañv. Kalz a skouerioù all a vourc'hioù damvarv a zo e kornog ar vro. Gouarnamant Tori (mirour) Saoz Londrez ne ra netra.

N'eus ket labour d'ar re yaouank gouest er bourc'hioù, ret eo dezho eta mont kuit d'ar c'hêrioù, da lec'hioù evel Kerdiz lec'h ma 'z eus ur bern Kembreiz genbraegerien o labourat war-dro ar skinwel hag ar radio, petramant da Vro-Saoz. Hep an dud yaouank gouest-se, ne chom den ken er bourc'hioù bihan da heñchañ tud ar vro. Setu penaos e varv ar sevenadur hag ar gevredigezh lec'hel war ar maez.

Ar goprou n'int ket gwall-uhel war ar maez, hag en anzer dremenet e oa marc'hadmat an tier. Hogen er c'hêrioù bras saoz e oa goprou uhel, ha setu penaos e c'helle pennoù bras an aferioù hag all paeñ muioù da brenañ tuez war ar maez e Kembre. Droch a-walc'h e oa perc'henned an tuez evit gwerzhañ anezho d'ar Saozon.

Daoust pegen grevus eo kudenn an tuez-hañv, ez eus ur gudenn all grevusoc'h c'hoazh o sevel a-enep tud ar vro : hini froud ar Saozon o tont eus Bro-Saoz da brenañ aferioù bihan e Kembre war ar maez. Int a c'hell gwerzhañ o ziez ker-ruz e Bro-Saoz, ha prenañ war-lerc'h un ti marc'hadmat e-skoaz o-hini e Kembre. Gant an arc'hant gounid a chom, e c'hellont krouñ aferioù bihan pe prenañ e-re digant tud ar vro.

Da skouez, e bourc'h Pentraeth en Ynys Môn, emañ teir stal ar vourc'h etre daouarn Saozon. Kement-se a dalvez eo bet cheñchet yezh ar stalioù (hag hini ar vourc'h evit dastum ar-c'hant a-walc'h a-benn prenañ ar stalioù, pe ne gredent ket mont-tre e bed an aferioù !

Dismegañsus ha faeüs eo ar Saozon e-keñver hor yezh. Ur Saoz en deus prenet ur c'harrdi e Porthaethwy (en Ynys Môn adarre) ha nac'hañ a ra degemer ar chekennou e Kembraeg. N'eus forzh penaos, o deus divizet bremañ tud ar vro chom hep mont d'e garrdi ken.

Nag ar c'huzulioù lec'hel, nag ar gouarnamant kreiz saoz ne roont arc'hant da grouif embregerezhioù kooperativel, ha ne lakont ket kennebeut perc'henned an tuez-hañv da baeñ muioù da delioù. O welout kement-mañ, hag en abeg m'o deus c'hwitet gant an holl zoareoù hervez lezenn, o deus kroget Kembreiz 'zo gant stourm devif an tuez-hañv evit denennañ an evezh war ar gudenn.

Un dra all a laka Kembreiz da fulorif eo diviz gouarnamant Londrez d'ober un enklask da welout hag-eñ e vefe mat ar vro, en hanternoz hag e-keiz Kembre, da sebliañ dilerc'hiadoù nukleel.

Ar gouarnamant Tori a fell dezhañ sevel ouzhpenn 25 kreizenn nukleel e Breizh-Veur. Ne ouzont ket c'hoazh penaos en em zizober diouzh an dilerc'hiadoù skinoberius !!!

Unan eus ar raktresoù a vefe interif anezho war-dro mil troatad dindan an douar; hag emaint da vat o klask e meur a dolead eus Breizh-Veur, pelec'h e vefe ul lec'h sur da interif ar restachoù !

E Powys (kreiz Kembre) eo bet krouet al luskad PANDORA a stourm a-enep ma vefe interet an dilerc'hioù, tra m'eo bet savet e tolead Dolgellau ha Machynlleth ul luskad lec'hel all anvet MADRYN (Mudiad Amddiffyn Dulas Rhag Ysbwriel Niwliar - luskad difenn Dulas diouzh al lastez nukleel). Geraint Bowen an hini eo a zo e penn MADRYN - kent arc'hdrouz Kembre-. An anv MADRYN, e kembraeg ar vro, a dalvez : louarn fin; ha marteze eo an arouez eus doareoù-ober al luskad en amzer-da-zont. Gwelet e vo.

## dre nerzh al lanv

Meur a zoare a zo da gas da get ur bobl vihan -pe ur rummad tud milliget evit abeg pe abeg. Doareoù "gwadek" a zo, da gentañ-holl : "an diskouml da vat", an disamm da vat a zo bet klasket e dizhout evel-se, en hor c'hantved "sevenet" kerkoulz hag e kantvedoù koshoc'h, na oant-int ket sevenet tamm ebet, anat eo. Lennit levr Kaezar, *De Bello Gallico*, ha c'hwil a gavo ennañ kontoù resis al lazhadegoù graet gant sevenadurourien Roma diwar goust Kelted an Douar Bras, ar re anezho n'asantent ket dont da vezañ Romaned. Ar Brotestanted, un nebeut kantvloavezhioù diwezhatoc'h, a zo bet hemolc'het ha muntret, en un doare heñvel a-walc'h, gant Gallaoued a gavo en o "gwir feiz" un digarez da lazhañ ar re all. Ar Gatared a zo bet heskinet en un doare gwashoc'h c'hoazh dre an abeg ma oant, n'eo ket hepken disivouderien, met ivez Okitaniz : ouzhpenn o relijion, o sevenadur ivez a oa disheñvel -ne c'hell ket ar seurt pec'hed bezañ dasprenet. Ur goulen bremañ : pet Breizhad a zo bet lazhet e-pad brezelioù ar chouanerezh ? Peseurt kementad eus poblañs Bro-Naoned ha Bro-Wened a zo bet kaset da get ? Diaes e vefe kavout ar respont e levrioù istor Bro-C'hall. Diaes e vefe zoken kavout ar goulen e kazetennoù an emsav, a vez koulskoude prederiet, er mare-mañ, gant ur bern distrujadedoù all : labourerien-douar ar Chouanerezh ne oant ket, emc'hañs, emsaverien "vat", ha n'eo ket o stourm, nag o foanloù, da vezañ enforet. Tos-toc'h ouzomp, n'eus ket diouer a lazhadegoù kaset da benn : un daou vilion bennak a gouerien, rummet evel Koulaked, a zo bet distrujet gant ar Sovieted. Holl ofisourien hag isofisourien an arme poloniat, bet o stourm a-enep an Alamanted, a zo bet lazhadeg gant ar Rusiañed ha douaret a vernadoù e koadoù Kattyn, e penn kentañ ar brezel diwezhañ. N'eus ket kalz a Yuzevien nag a Jipsianed a chom bev el lodennoù eus Europa kouezhet e dalc'h an Alamanted. Ha ne chom ket kalz a Armeniz ken el lodennoù

eus Armenia kouezhet e dalc'h an Durked. Rummadoù a-bezh -kelennerien, skolaerien, medisined, kargidi, soudarded, boñzed a zo bet peurzistrujet gant ar C'hmered Ruz. An Indianed, abaoe un daou gantved bennak, a hillig ar c'hoant distrujañ er Re Wenn, a bep seurt arliv, o deus avi d'o douar, d'o c'hoadoù, d'o doureier, d'o finvidigezhioù.

Un doare all d'en em zisammañ a zo bet harluañ, kas er-maez eus o bro-hep lazhañ, ar pezh ne dalvez ket hep lakaat da vervel - ar re en em gave, evel-se, siwazh dezho, a-greuz hent an arakaat hag ar sevenadur. Iwerzhoniz a zo bet skarzhet kuit eus lodennoù pinvidikañ o bro ha kaset da finvezif e-touez lanneier ha meinegi Bro-Gonnac'ht. Skosiz, a-boan ma 'z eus kant vloaz, a zo bet karget, a-dropladoù, e kozh bagoù paramantet a-ratozh evit o c'has da Vro-Ganada pe d'an USA (e-lec'h ma oa difennet outo dilestraf), ha peget an tan diouzout en o zier ha kêriadennoù, da denañ diganto ar c'hoant da zistreiñ ; un dra na ouzer ket : an Itron Beecher-Stowe, brudet evit he levr fromus diwar-benn morianed bro Amerika, Uncle Tom's Cabin, a zo bet paeet gant familh vras Sutherland evit sevel ul levr a-du gant "naetadeg vras" an uheldirioù ! A-hend-all, ne vez ket root atav an "urzh", en un doare rust, sklaer, hag anat, da "skarzhañ anezho kuit". Doareoù soutilloc'h, siouloc'h, didrousoc'h a zo, hag a zegouezh d'an hevelep disoc'h : lakaat (pe "lezel") da c'hoari al "lezennoù ekonomikel". A-drugarez d'al lezennoù-se ne vo ket mui kabius ar galloud impalaerelour : rak, anat eo, ne vo ket displeget d'an dud e c'hell ar galloud lakaat ar seurt lezennoù da c'hoari e-giz ma kar. Evel-se, en naontekvet kantved, e vo skarzhet ur milion a dud eus Breizh da heñ ganedigezh ar gaptalouriezh ijinerzhel. Evel-se e vo skarzhet Kembreiz diouzh lodenn hanternoz o bro -skarzhed war-du Liverpool, Birmingham ha London- e-keit ha ma vo lakaet Saozon da enbroañ el lodenn greiz-teiz, Saozon baour kaset di da labourat er mengleuzioù hag el labouradepoù-dir.

Ha setu just a-walc'h un doare all c'hoazh da gas ur bobl vihan da get ; tekneq al "lanv". Ar skouer vrayañ a zo

bet roet nevez 'zo gant Bro-Varoko pa 'z eo bet kaset un tri c'hant pe bevar c'hant mil fellah bennak da aloubif al lodenn-zouar anvet neuze Rio de Oro. N'eus ket bet ezhomm a fuzuilhoù. Ur wech krog ur seurt morad a dud da vont war-raok, penaos o dije gallet un nebeut miliadoù Touaregi pe Sahraoui herzel outo ? Ha taolit evezh mat : pep hini eus ar fellahed war vale ne oa nag un impalaerelour daonet nag ur c'hapitalour milliget : evitañ e-unan ne oa ket an disterañ gounid en abadenn.

an dekneg-se, tekneg al lanv, leviet sioul a-hed bloavezhioù ha bloavezhioù -ha n'eo ket mui e stumm un taol reverzhi evel hini Marokiz a zo bet, hag a vez, implijet a-vas, o vountañ tud paour da denañ o douar, hag o bro, digant tud paour all. Aesaet e vez alies al laerezh douar gant an doare "perc'hennañ" douar a zo er vro aloubet. Ne vank ket ar skouerioù. En Iwerzhon hag e Bro-Skos e oa an douar tra ar c'hosgor, ar c'hlan, tra an holl ha n'eo ket tra an den-mañ-den : ne oa dihell ebet, paperenn ebet, o reif prouenn eus ar berc'hentiezh ; aes e oa d'ar roue saoz, neuze, reif, pe gentoc'h gwerzhañ, d'e soudarded pe d'e vignoned douaroù na oa perc'henn ebet dezho hervez e lezenn. (Hiziv c'hoazh ez eus en Iwerzhon ur bern tachenoù hag a vez perc'hennet diwar "emglev dre gomz" : penaos e vije bet tu da lakaat sinañ pape-riou ar susit pa oa aet an darn vrasañ eus ar susitourien da vro-Amerika, pe da vro-Australia, ha kollet pep roud anezho ?) Evel-se ha ken aes-all, eo bet dilodet Aljeriz eus douaroù gwellañ o bro : ne oa "perc'henn ebet" dezho ! Ha daoust hag un emskiant a laeron a oa gant al labourerien-douar varmaoniet a veze kaset eus Breizh, hag eus lec'h all ivez, da drevadenniñ du-se ? Paperioù perc'hentiezh a veze roet dezho, gant o gouarnamant, ha ret e oa dezho paeañ zoken -alies amprestañ, ha gwerzhañ o madoù dister, evit paeañ ! Dre zoareoù heñvel, harpet gant galloud an arc'hant, gant gwask al lezenn, ha gant pouez-poblañs an "amezeg" e vez lakaet hiziv ar pobloù hag ar broioù bihan en arvar da goll o buhez. N'eo ket diouzh ar Vondaned alaman o prenañ kastilli en Iwerzhon na diouzh ar Sheiked arab o

prenañ manerioù e London pe er Sussex e teu an dafjer : ar re-se ne gemeront ket perzh e buhez pemdeziek ar vro, n'o deus pouez ebet warni. Eus a lec'h all e teu an dafjer gwir, ha setu perak e vez tavet warnañ.

Degasomp skouerioù. Degasomp skouer Kembre, gant skol-veur Bangor. En hanternoz Kembre, gouzout a ouzer, e chom ar c'hrefnvañ ar yezh hag ar bevañ an emskiant vroadel. Ouzhpenn-se, ret kaout soñj, ez eo ar c'hembraeg ur yezh komzet gant un niver bihan-tre a dud, ken ez eo a bouez bras evitañ an disterañ komuniezh. Kaoz a oa bet da ober eus skol-veur Bangor ur skol-veur e kembraeg penn-da-benn : daoust hag aet e vije ar gouarnamant saoz da enebañ ouzh ur menoz ken kaer, ken aes da gas da benn, pa oa a-du, ez-ofisiel-tre, gant difenn ha gwerezif sevenadur Kembre ? Nann 'vat ! Pezh a zo bet divizet, gant kalz a vadelezh, komprenit mat, eo "datblygu", da lavarout eo kreskiñ, brasaat, diorren skol-veur Bangor. Piv a vije bet a-enep -nemet an nebeut tud brell a vez kontrol da bep arakadenn ! ! piv a vije bet a-enep ? N'eo ket ar gelennerien, n'eo ket kuzulierien gér, n'eo ket ar genwerzhourien, anat eo ! Muioch a studierein a oa muioch a vuhez, muioch a arc'hant, muioch a daihoù ivez e kef kuzul-kér. E 1950 e oa, en holl skolioù-meur Kembre (e gwirionez, ur skol-veur hepken a zo e Kembre, rannet etre pemp "coleg" : Kerzid, Abertawe, Aberystwyth, Bangor ha zoken, bremañ, Llanbedr), neuze 'ta e 1950 e oa 5284 studier, 83,9 % a oa o annez ganto e Kembre, 2,4 % a zeue eus broioù tramor, ha 13,7 % a zeue eus Bro-Saoz. Eveljust, kement-se ne dalvez ket e oa Kembre kement hini a oa gantañ e chmlec'h e Kembre, na Saoz kement hini a zeue eus an tu all da "Kleuz Offa" : kalz kembreiz, harluet o familhoù diouzh ar vro gozh, a zeue war o studi da Gembre ; dre vras avat, e oa evel-se, eus Bro-Saoz e teue Saozon, ha Kembre a bourchase kembreiz. E 1970 - ugent bloaz war-lerc'h - ne oa mui nemet 39,5 % eus ar studierien o tont eus Kembre ; 4, 8 % a zeue eus Tramor ha 55,7 % eus Bro-Saoz. Niver ar studierien gembreat a oa kresket eus 5,6 %, hini ar studierien dramor eus 263,7 %, hag hini

ar studierien saoz eus 809,9 % : setu petra oa bet an "datblygu". D'ar mare-se, da lavarout eo 1970, e oa raktresol nevez evit kreskiñ c'hoazh niver ar studierien e skolioù-meur Kembre dre 59,9 % -daoust d'ar stourm a oa o kregif a-enep da saoznekadur ar skolioù-meur. Ha, souezhus (pe get !): dija e oa gant Kembre, dre gevatalder, muioch a skolioù-meur eget e Bro-Saoz, ha divizet e oa koulskoude, gant tud London, lakaat skolioù-meur Kembre da greskiñ buanoc'h eget re Vro-Saoz. Arouezius : d'ar memes mare e oa anvet ur Rusian e penn Skol-veur Tarta, en Estonia, ha lakaet da zanvez-pennañ e studioù ar Skol-veur ar Soviedeled ha n'eo ket mui sevenadur Estonia.

E 1970, e skol-veur Bangor, e oa nebeutoc'h eget ur c'hard eus ar studierien o tont eus Kembre. E 1977/78, war 3001 studier, e oa 654 eus Kembre, 256 eus broioù tramor, 34 eus Bro-Skos hag en tu-hont da 2 000 eus Bro-Saoz. E-touez ar 654 Kembre ne oa mui nemet 351 kembraeger ! Da belec'h e oa aet huñvre kaer ar skol-veur gembraek ? Ha n'eo ket ar skol-veur hepken an hini a zo saoznekaet : ar vro ivez : e 1977/78 e oa 1417 studier o vevañ er c'hériadennoù tro-dro da gér, alies-tre e tiez a vez feurmet e-pad an hañv da hañvourien saozneger - da lavarout eo e tiez a zeu da vevañ, a-hed ar bloaz, kreizennoù saoznekadur. Lec'h ar saozneg er vro-se a gresk war un dro gant ar voterezh a-du gant ar virourien.

Ur stourm kalet a zo renet bremañ gant studierien Kembre. Ur sindikad dezho o-unan a zo bet savet e 1976 ha, peogwir n'eus ket deut kalz gwellaennoù diwar ar bruderezh, ar prezezennoù hag an doareoù-stourm peoc'helour all, ez eus bet kroget gant stourmadegoù taeroc'h : e miz Kerzu 1978, da skouer, ez eus bet skrapet 3 000 dossier kaset d'ar skol-veur gant tud yaouank c'hoant dezho dont, eus Bro-Saoz, d'ar skol-veur-se, ha goude-se ez eus bet kroget da zistrujañ rolloù al levraouegoù. Studierien-Kembreiz anat eo - a zo bet taolit er-maez eus ar skol-veur ha difennet outo kenderc'hel gant o studioù : dihaocvez avat e vez kaset war-raok ar stourm evit ar c'hembraeg

er skol-veur. A-benn ar fin eo deut, war a seblant, kuzul-kér Bangor ha Kuzul ar skol-veur da gompren na oa ket mat kreskiñ ar skol-veur kemend-all -met pet Kembre a zo bremañ er skol-veur, koulz e-touez ar studierien hag e-touez ar gelennerien ?

Gant ul lanv all -e Kembre evel e Breizh- emañ lakaet ar yezh en arvar-gant lanv an douristeled. An douristed war dremen koulz hag an douristed da chom, da lavarout eo an dud war-o-lev, an dud a bren un ti bihan da dremen week-endoù ha vakañsoù -tud hag a zegas, peurliesañ gant ur mousc'hoarzh ha doare hegarat, arc'hant (daoust ma ne vez ket studiet gwall aketus arboellerezh an douristeled : gant piv e vez paet ar servijoù-douar, ar servijoù-dilastezañ, h.a., na gavont o implij leun nemet en hañv pa teu an douristed ?) tud hag a zegas, neuze 'ta, arc'hant da saozneg er vro. Gant an dud-se e vez, peurliesañ, arc'hant, ha penaos e c'hellfe ar c'houblad kembreiz yaouank, nevez-dimezet, kinnig uheloc'h priz d'un ti bihan eget ur c'houblad Londoniz war-bouez bezañ lakaet war o leve diouzh ar velestradurezh uhel pe diouzh ur vicher arbennek paet-mat ?

Stourm a zo e Kembre a-enep d'al lanv-se : meur a zoare stourm a zo, a-hend-all. E-pad ur mare o deus tud yaouank Cymdeithas yr Iaith miret ouzh ar gwerzhioù da vevañ graet : pa veze embannet ur werzh dirak an holl e ti an noter, e teuent war al lec'h, taurel ar c'hadorioù hag an taolioù en traon, ha mirout ouzh an estrenien da bremañ. A-wechoù all e veze e gwer prenistri an tiez bihan perc'hennet gant Saozon (er vro-se n'eus ket stalioù nag abavañcheier war ar prenistri) pe zoken graet kamping, pe squatting, en tiez-se : un niver uhelik a dud a zo bet kaset dirak al lezioù-barn evit ar seurt traoù. Un doare all a zo bet, neuze, hag a zo atav : savet ez eus bet ur gevredigezh anvet Adfer, hag a bren an tiez lakaet e gwerzh, a gempenn anezho, a lak enno kement tra a zo ezhomm da vevañ, hag a feurm anezho, goude, evit ur briz deraat, da familhoù kembraegerien yaouank. Gant Dafydd Iwan eo bet savet ar gevredigezh-se, hag a ya atav en-dro gant ha labour.

## Iwerzhon: 700.000 den er straedoù

E-pad un hanter zevezh a-bezh eo chomet pep tra e Bro Iwerzhon mut ha difiav. Muic'h evit un hanter vilion a labourerien, o vont da heul an I.C.T.U. (Irish Congress of Trade Union) o deus kemeret perzh er gendiskuliadeg vrasañ abaoe savidigezh ar Stad e 1921-22. Serret al labouradegoù, ar bankoù, ar skolioù, ar burevioù, didud an ostalerioù, sac'het ar busoù war vord an hent (netra souezhus aze !) dilezet kirri-nij Aer Lingus, ha dreist-holl, goull ar puboù ! Petra 'c'hoarvez 'ta ? Iwerzhoniz o klemm e oa bet flastret o strollad rugby gant ar Saozon ? Tamm ebet ! O c'houlenn e teufe ar pab en-dro da Zulenn ? Ker awalc'h en deus koustet evel-se ! Nann, o klemm hag o c'houlenn e oant, gant gwir abeg, ma vefurzhiet hag ingalet an tailhoù etre ar re baour hag ar re binvidik, etre al labourerien hag ar gouerien.

An dud a oa diskennet war ar straedoù en devezh-se 'vez graet P.A.Y.E (Pay as you earn) anezho. Ma c'hounezit, da skouer, 300 lur sterling ar miz, e resevoc'h ur chekenn 200 lur sterling e dibenn ar Wiz 100 lur (a-wechoù muic'h pe nebeutoc'h) a vo aet e kef ar Stad, hep m'ho pefe grik da lavarout. War baemant ur vaouez dimezet ez a an hanter d'ar stad.

E 1978 n'o deus ar gouerien paeet nemet 35 milion a lurioù (interestoù war an amprestoù ha tailhoù mesk-ha-mesk). E 1979 o deus paeet 62 milion a lurioù, da lavarout eo 6 % deus ar gounid graet ganto. Abaoe m'emañ Iwerzhon er marc'had-boutin, en deus kouer ar vro-se resevet muic'h a argant eget n'eus forzh peseurt hin all en Europa. Pa ouzer e vez Iwerzhon bro al labour-douar e komprenner buan piv emañ pouez an tailhoù o flas-trañ. (E-touez abegoù all, setu aze unan a laka labourerien an Ulster da brederiañ diwar-benn an unvaniezh...).

Bez e oa 400 000 den e Dulenn, 75 000 e Kork, 60 000 e Limerik, 30 000 e Galway (bez e oa tud zoken e "gouelec'h" an Donegal !) o youc'hal ne felle ket dezho paeañ tailhoù ar re binvidik :

TAX THE GREEDY, NOT THE NEEDY  
TAX LAND PROPERTY SPECULATORS AND NOT  
PAYE WORKING CLASS  
EQUAL TAXES FOR THE MARRIED  
IS THERE A LIFE AFTER TAX ?  
THE FARMERS AND THE COWBOYS ARE FRIENDS

Setu un nebeut eus ar skritelloù a oa tu da lenn. Bez e oa, eveljust, ul lodenn vat anezho diwar-benn Charles HAUGHEY, penn-rener ar gouarnamant : "TAX CHARLIE'S FRIENDS"...

Evit ar wech kentañ abaoe 1907 (abaoe m'o doa poliserien Belfast unanet gant al labourerien renet gant Jim LARKIN) e o tu gwelout poliserien ar Republik (ar garfa) o vont da heul al labourerien. Gwelet 'z eus bet ivez implijidi unan eus bankoù brasañ Iwerzhon (an Irish Allied Bank) war ar straed... rener ar bank e penn ! Div eur a oa ezhomm evit treuziañ O'Connell Bridge ha bez e oa c'hoazh tud n'o doa kuitaet Parnell Square.

E-keit-se e oa an Taoiseach hag e skoazellerien (dilezet gant o sekretourez hag o implijidi) o studiañ penaos an diaoul e teufent a-benn da espern ar c'hant = espern muic'h ha dispign nebeutoc'h, eveljust. Met n'eus ket kalz tra da espern ken, hag ouzhpenn-se, diwar goust piv espern ? An die, abaoe m'eo deut Fianna Fail en-dro d'ar galloud e 1977 a zo kresket d'un tizh spontus. Prometet o doa, eveljust, evit adkavout ar galloud : prometet krouiñ 25 000 labour bep bloaz (e pelec'h emaint ?), prometet izelaat hag ingalañ an tailhoù (emichañs o deus faziet war ar gerioù). Goude c'hwec'h miz galloud en doa Jack LYNCH (deut eo da vezañ rener un trust hollandad abaoe e zilez) amprestet 545 milion lur sterling digant an estrenvro. Ken uhel ha 1030 milion lur eo bremañ an die. Seurt die, pa vez yac'h ha kreñv an arboellerezh n'eo ket sebezus ; an darn vrasañ eus ar gouarnamantoù a zo golc'et gant an die. Met en Iwerzhon e teu kement-se da vezañ arvarus pa soñjer :

- N'eo ket brav stad an arboellerezh ha n'emañ ket e riskl da wellaat !

- Un dic'hounid 650 milion a zo bet er bloaz 1979.

- Prezegenn an Taoiseach war RTE (Radio Telefis Eirrann) nevezig 'zo n'eus degaset netra nevez : "bezit fur, labouromp start ha kendalc'homp"... ha gwashoc'h, n'en deus displeget arboellerezh nevez ebet !

Ar gendiskuliadeg-se he deus diskouezet splann e oa aet skuizh an dud gant an tailhoù, ken dizingal. Diskouezet o deus ivez e oant aet skuizh gant ur gevredigezh rannet etre daou (kouerien war un tu ha labourerien war an tu all). Gwelout a reer n'eus diskouml politikel ebet pa vez ret dibab etre Fine Gael ha labour war un tu ha Fianna Fail war an tu all ! Goude holl, emañ G. FITZGERALD (penn-rener ar Fine Gael) o paouez lavarout da sindikad ar gouerien ne vefe ket kemmet doare an tailhoù ma teufe e strollad d'ar galloud !

Ret eo ivez soñjal e niver an dud n'o deus ket zoken padra da vevañ, e niver an dud dilabour, en ur vro tonked dre nerzh an Istor d'an divroañ (an diskouml anat ha nemetañ amañ). Bez ez eus, e Dulenn, 10 000 familh o c'hortoz kaout un ti dereat awalc'h da vevañ ennañ. Bep sizhun 'vez stlapet familhoù a-bez war ar straed ; distrujet 'vez ar rannidoù louedet ha kozh 'lec'h oant o vevañ evit sevel burevioù hag ostalerioù. Burevioù euzhus emeur o sevel e Wood Quay, ar gêr viking goshañ dizolc'et daou vloaz 'zo e Dulenn.

Peseurt dazont a zo gant ar gouarnamant nevez-mañ ? Coude dilez Jack LYNCH eo bet anvet HAUGHEY gant ar Fianna Fail, a-enep e enebour a-viskoazh G. COLLEY. Strizh eo bet an disc'h : 38 mouezh evit COLLEY ha 42 evit HAUGHEY. Daoust ma seblant unanet ha feal ar strollad e santer memestra un troc'h ennañ. Labourer en deus start HAUGHEY hag e-unan penn evit tizhout ar pal uhelañ ; n'eo mab da zispac'hour kozh ebet evel an darn vrasañ eus pennoù bras ar strolladoù politikel en Iwerzhon hag enebourien dispriuzius en deus. Den amañ n'en deus disoñjet "afer an armoù". Un 10 bloaz bennak 'zo e oa bet kaset HAUGHEY dirak al lez-varn evit bezañ degaset ha gwerzhet armoù dre guzh d'an IRA.

Ma fell da HAUGHEY chom e-lec'h m'emañ eo ret dezhañ labourat kalet ha buan. Setu ar pezh a zo bet lavaret dezhañ gant 700 000 Iwerzhonad. Met betek-hen, n'eus bet respont ebet...

HENRI DEWEZ

Per DENEZ

# HOR YEZH

koumanant: 50 lur

CCP Denis I499-51 Rennes  
Per Denez, Ri, Ploare

29100 Douarnenez

## breizh

### an tanio eo, ar wech-mañ...

Tost da zaou vloaz goude an AMOCO-CADIZ, aet d'ar c'hostez e-tal Porsall, setu aodoù Bro Dreger saotret gant lous-toni du an TANIO. Ar c'hwec'hvet gwech eo d'ul lestr-eoul mont d'ar strad e-tal aodoù Breizh. An TORREY-CANYON a oa bet an hini kentañ, trizek bloaz'zo. Abaoe, n'eus bet ehan ebet d'an darvoudoù. Muioc'h evit 700.000 tonenn eoul a zo bet skuilhet e-giz-se war ar sonn pe a-heñ aodoù ar vro.

D'ar 7 a viz Meurzh e voe klevet ur c'helou er radio o tisplegañ e oa paket fall ul lestr-eoul e-tal Enez-Vaz, met ne oa "danjer ebet". Pa erruas ar ramaker "Abeille Languedoc" war al lec'h, ne chome ken tamm a-dreñv ar vag war ar mor. An tamm arak, en, en doa toulet betek ar strad, 87 metr dindan live ar mor. D'ar sadorn 8 a viz Meurzh e voe divizet ramokiñ tamm arak an TANIO betek an Havar. D'ar sul vintin e tizhe an eoul aodoù Bro Dreger, hag e-pad ma veze meulet deomp oberiantiz ar verdeadurezh, savetaet ganti akipaj al lestr ha sachet an tamm-peñse betek Antifer, e oa tud ar vro war an aodoù gant pep a loa-bod ! D'an 11 a viz Meurzh e tivizas ar prefed goulenn sikour ar "plañpolmar", ur "plañ" (?) en deus diskoezet meur a wech pegen efedus e oa... Kaset e voe neuze 1 500 soudard bennak da "blañpolmarin" gant rastelloù, palioù, salioù-teilh, hag all. Evel boaz ! An urzh : naetaat an aodoù... evit an dou-risted eveljust. Ret eo dilouzañ buan-buan rak dav eo dezho dont da Vreizh, er bloaz-mañ c'hoazh, da zispign o arc'hant. Penaos e vevimp, a-hend-all ? Piv a vez chalet gant distruj buhez ar mor ? N'eo ket Aymar ACHILLE-FOULD, disoñjet gant an darn vrasañ eus an nebeut re o doa klevet komz anezhañ ha diskoachet a-daol-trumm eus Doue-our-pelec'h pa lavar : "Riskloù a vez atav pa ouzer e tremen 500 milion tonenn eoul bep bloaz dirak aodoù Breizh, ha Bro-C'hall ne fell ket mui dezhi paeañ ar freuzoù hec'h-unan". Kement-se a dalvez e vo c'hoazh listri-eoul o vont d'ar c'hostez hag eo ret espern gwenneien ar stad

(evit prenañ eoul, dres). Ne oa ket tu da gomz sklaeroc'h : ar gudenn, piv a baeo an darvoudoù da zont ? Goude an diskleriadur-se eo aet ACHILLE-FOULD da genderc'hel gant e vored ha deuet LE THEULE, ur ministr bennak anezhañ, war an dachenn. Deuet eo, gwelet en deus hag aet kuit en ur lavarout e koustefe ket ruz sunañ an eoul sparlet er vag-peñse ha keroc'h c'hoazh un advoradur. Da lavarout eo e koust pep tra re ger ha ne vo graet netra ! Emichañs e oar ar ministr-se e koust pep beajour war ar c'h-Concorde 5 000 lur nevez d'ar stad : hep ar skodenn-se ne c'hellfe ket an tamm hernach lorc'hus mont div wech ar sizhun da v-Bahrein pe da v-Brazilia ! Emichañs e oar ivez ar ministr-se pegement en deus koustet sevel Beaubourg, hag all, hag all... Kement-se, avat, n'eo morse bet kavet re ger, ur souezh ! Ur bloaz 'zo eo aet ar GINO da sankañ he fenn e-barzh an TEAM CASTOR hag abaoe emañ gludet e strad ar mor e-tal Ouesan gant he c'hargamant, 40.000 tonenn eoul fetisoc'h eget an dour (1,09) o skuilhañ war ar sonn. Tonket eo da chom aze da vreiñañ, dre youl ar gouarnamant. An TANIO ivez a vreiño e-tal Enez-Vaz. Re ger e koust.

Mil Breizhad bennak a zo aet da b-Pariz arak Pask, da glemm. Degemeret int bet a daolioù bazh gant ar flied. Klas- ket o deus an dileuridi gwelout GISCARD. Degemeret int bet gant iz-sekretour an Elyse a lavaraz dezho e oa peurglok roll-labour ar prezidant. Kement a labour en doa ar GISCARD ken e tivizas, daou zevhez war-lerc'h, mont da g-Courchevel d'ober ski : un doare da ziskui- zhañ, emichañs. Taolioù bazh, dispri- zhañ, emichañs, setu lod ar vretoned. Gant ar c'haoc'h ouzhpenn, hag EVIT NETRA ! Poent eo ivez da Vreizhiz 'zo kompren n'hon eus netra da c'hortoz digant ar Stad C'hall. Divroañ, distruj ar yezh, ober eus Breizh ur mell kamp soudarded, sevel kreizenoù nukleel a-enep youl an dud, a zo pal ar galloud. Ma ne fell ket deomp kreviñ evel chas klañv eo ret deomp dont da vezañ mestr en hor bro.

STEVEN




SK. GWENAEI HUON

### AN TANIO FAG AL LABOUSED-MOR

Sellit ouzh al laboused-mor-mañ : ar poc'hanig an hini eo. A-barzh nebeut ne vo mui anezhañ e Breizh. Saotradur an Tanio a zo bet div wech gwashoc'h eget hini an Amoco, evitañ d'an nebeutaf. Er Jentilez e oa stag tud an S.E.F.N.B. da gas un toullad poc'haniged yaouank eus a bell vro da Vreizh evit ad-sevel ar ouenn-se o vont da get. Ul labour vat a oa bet graet ha fiziañs a oa da gnout, siwash dezho, setu ul lanv du all deuet da foeltrañ pep tra. Nag an ero beg hir, nag an ero beg plat n'int bet gwelet war an enezenn abaoe. Da belec'h int aet ? Ha marv e vijent ? Den ne oar re vat. Ar morskoul, evitañ da zont abretoc'h da sevel e reizh war an enezenn, ne c'helle nemet ober un tafva d'an eoul milliget-se, 25% anezho zo bet louzet. Gwalc'hif al laboused, lemel an eoul diwar o flu a zo ur wall-afer, o zeurel er nor bras en-dro a zo un afer all. Ma vezont laosket da vont ne abred e varvont; laosket re zivezlat e voazont ouzh an den ha Doue oar pegement a ranker disfi outañ. Ma ne wije nemet an Tanio ur wech ar bloaz. Mann, bemez e vez rechetet eoul er nor ha bemez e kaver laboused marv war an aod.

TUDU





SK. O WENABL HOON





## skol diwan an oriant

Tud zo c'hoazh dre ar vro ha ne ouezont ket anezhe petra eo skolioù Diwan. Eh an ne amañ da zispleg deoc'h penaos e kerzh an traoù 'ba' ur skol Diwan, hani an Oriant, ur skol vrezhoneg e Bro-Wened.

Perak bout bet savet skolioù-mamm e brezhoneg ? Tro ho peus bet marse da lenn un nebeut skridoù-brudinañ :

"Setu oc'hpenn kant vle emañ ar Vretoned e c'houlenn ma vo desket brezhoneg er skolioù ; betek bremañ n'eus bet roet deomp nemet bruzun.

Ne faot ket deomp gortoz ma vo inte- ret hor yezh. Setu perak, el m'o deus graet ar Vasked en o bro, ar Vretoned, int-o-unan 'deus komañset sevel skolioù brezhoneg.

Digor eo skolioù Diwan d'an holl vugale. Ne vez goulnet blank erbet ged o zud. 13 skol-vamm zo dija ha re 'rall zo da zigor c'hoazh.

Afer an holl Vretoned eo skolioù Diwan. N'int ket staget doc'h kevredigezh relijiel na bolitikel erbet. Ne vevont nemet diâr an argant roet dehe get an dud."

A-c'houde kant vle zo emañ ar Vretoned e c'hortoz, e vanifestiñ, e tuñ paper, e kas sinadegoù kounnaret da bennou bras Pariz ha d'o mevelion er vro evit ma vo kelennet o yezh ba'r skolioù.

Karradoù paper aet da vreiñañ ba'solierioù ar republik. Nag ar soñj zo daet d'un dornadig tud, a'benn ar fin, da sevel o skolioù dehe, skolioù-mamm e brezhoneg.

Mall bras oa dic'houiskiñ ha dibikouziñ hon daoulagad. Savet eo bet da gentañ skolioù Diwan Lambaol, Kemper hag ar Releg. Ha diwezhatoc'h neuze emañ bet savet ar re 'rall e Brest, en Uhelgoad, en Naoned, en Oriant, e Roazhon hag ivez e Tarieg, Beg Leger, Kastell-Paol, Kallag ha Ploneour-Lanvern. Emañ skol an Alrae ha skol ar Faou edan bout digoret.

Ne vevont nemet diâr an argant roet dehe ged an dud, ar vezh ruz ! Ha gwir eo neac'h, betek bremañ n'omp ket bet sikouret kalz ged ar stad c'hall : anat eo ivez ne oa ket kalz a dra da c'hortoz.

Mont 'ra milionou ar chart da adsevel chapelioù kozh ar vro petramant da brenañ koefoù dantel ha bloukou argant da zibunerion ar c'heic'hioù keltek.

Ganeomp-ni 'c'hat, ne vezer ket ken brokus (petra faot deoc'h ; ne vez ket digor hor skolioù e-pad an hafv)...

Argant a-walc'h hon eus-ni kavet ur sort, ar pezh a ziskouez splann emañ ur bochad Bretoned a-du ged Diwan, ged kelennadurezh ar brezhoneg dre vras.

Kestall, gwerzhif pegsunioù, an traoù-se ne vehe ket ret deomp gober marse pa ne yahe ket rac'h argant an taosoù ged brini Pont-e-Kroaz...

4 skol ar ble kentañ, 9 an eil ble ha 13 ar ble-mañ, muioc'h c'hoazh 'benn niz Gwengolo ha komz a raer memes a sevel skolioù kentañ derez ! Mont a ra mat-awalc'h an traoù.

Digoret eo bet skol an Oriant da benn-kentañ ar blead-skol 78 / 79. 14 krouadur ha ne ouezent ger brezhoneg erbet.

Daet eo M. J. , ar skolaer kentañ, da-benn a lakaat anezhe da gompren mat ar brezhoneg.

Bout zo 11 krouadur genin ar ble-mañ 'barzh ar skol, 8 paotr ha 3 flac'h. 8 anezhe oa dija er skol arlene, a gompren mat enta, daousto dehe gober c'hoazh ged ar galleg kenetreze (ur bochad aesoc'h eo dehe) met pa c'houlennont un dra ben-nak genin e implijont ar brezhoneg. Dre bep div wezh e-kreiz o c'hoarioù e ta ar brezhoneg gete en un doare en-naturel.

Er-maez ag ar skol eo e vez ar muiañ a vrezhoneg gete, ha gwell-a-se met n'eo ket kalz a dra c'hoazh ; mont 'ray 4 anezhe, benn ble, d'ar skol kentañ derez hag aze emañ an dalc'h ma n'hellont ket kenderc'hel ged ar brezhoneg.

Labourat 'ra ar gerent doc'h o zu, pe da zeskiñ ar yezh pe da gomz ar muiañ posupl ged ar vugale ba'r gêr. Savet eo bet skolioù Diwan evit deskiñ brezhoneg d'ar vugale, yezh ar skol eo ar brezhoneg ha yezh ar gêr 'zle bout ivez.

Ne faot ket disoñjal emañ Diwan ur gevredigezh ma vez enni skolaerion ha skolaerezed doc'h un tu ha kerent doc'h an tu 'rall e labourat a-gevret da zesevel vugale e brezhoneg, da bep unan d'ober e seizh gwellañ, el ma lar ar bigouter.

Tudigoù 'zo o deus laret pe skrivet e oa Diwan ur skol divyezhek : divyezhek n'omp ket : komz a reomp brezhoneg nemetek.

Beuzet omp 'ba' mor ar galleg a-hed ar sizhun ha tro ar ble : trawalc'h a

draoù else ! N'eus netra da c'hounit en divyezhegezh, un hent dall eo ha netra ken.

El ar re 'rall e vez digor skol Diwan adal 9 e. da vintin betek 4e.1/2 d'enderv.

Ma labour : kennig traoù d'ar vugale ; c'hoari, tresiñ, liviñ, dañsal, didro-c'hiñ paper pe deskiñ kanennoù hag all... e berr komzoù : klask digor o spered ar bep tra hag o lakaat da anvout o c'horf, da labourat ged o divskouarn hag o daoulagad, ged o daouarn hag o zreid... hag ged o zeod ivez eveljust.

Digor eo ar skol ar ar vuhez pemdez- ziek ; arlane oa aet ar vugale da di ur baraer en doa displeget dehe penaos vez graet bara. Aet omp, pa oa koulz hen ober da serrif kistin ha da granketa ar an aod. Gwellet o deus ivez un diskouezadeg savet diâr-benn an Eskimoded.

Dont 'ra tud d'ar skol, brezhonegerion d'al liesañ a za da gomz genomp : "d'an oad-se ne ouezen ket me 'maed brezhoneg..." hag else em eus dastumet un nebeut rimadelloù o doa desket ar varlenn o mammou.

Da goulz merenn e ta ur vamm-gozh ag an Oriant da sikour genin ober ar o zro... Dont 'ra bemdez d'ar skol, da zek vle ha tri-ugent...

Met n'hellan ket komz ag ar skol hep laret al labour a ra tud ar c'homite-skoazell. Bepred o deus kavet deomp an argant a oa d'ober anezhañ evit lakaat ar skol da gerzhet. Festoù-noz zo bet savet gete, abadennoù sonerezh ivez. An "treuzrad" an hani eo en deus graet berzh ha brud. E-kreiz an hañv, en Oriant ; 'pad ar Festival Etrekeltek e oa. 'Treuziñ lenn-vor an Oriant oa d'ober ha kement-se en ur boulevat.

Ur veaj da g-Cork oa da c'hounit. Daet oa pesketaourion ar vro ha start eo bet ar c'hrogad. Aet eo ar maout, ha pouez an hani pounnerañ e gwinn, ged re Lomener.

Laret a raer e tay, ar ble-mañ, o c'hensortet ag an tu 'rall (Bro-Skos, Bro-Gembre).

Serret eo bet argant, dre ma oa, ar bep bag, ur bomm bruderezh bennak : pemzek bag, pemzek skritell, pemzek stal hag o deus roet o skoedou da Ziwan.

Brud vat evit hor stourm, pennadoù er c'hazetennoù a-hed ar sizhun, setu ar pezh en deus degaset deomp an treuzrad-se.

SIVID



Adal ma chomo bev ar poellgor-skoazell e chomo bev ar skol ivez.

Chañs diwezhañ ar brezhoneg eo skolioù Diwan. Skolioù ur bobl wasket int ivez, ur bobl a zo o klask beviñ en he sav, komz en he yezh ha labourat en he bro.

Mar da deomp trec'hif, ha spi 'm eus e vimp trec'h, ne vo ket atav a drugarez d'ar sindikadoù skolaerion na d'ar strolladoù politikel. Daou pe dri ble 'deus gortozet un nebeut anezhe 'raok sevel a-du ganeomp. Ar re 'rall 'deus savet a-benn kaer a-enep : kilstourmerion ar gouarnamant kenkoulz el Jakobiñed an tu kleiz blot...ha kredif a raont embann c'hoazh e toujont d'hor sevenadur !

Komzoù goull ha netra ken, ha n'eo ket pa vehe kaset ar brezhoneg da bark al leueoù e ouelehent kalz !


4 skol ar ble kentañ, 13 ar ble-mañ ha ugent marse a-raok ar ble-nevez : Divaniñ ra bokedoù ar goanag, ha n'eus namaer ar re o deus daoulagad ha ne vellent ket n'o deus ket c'hoazh merzet o liv.

Daniel DOUJET, skolaer Diwan an Oriant.

## DIVIZ

### indianed ar c'hebek

pennad-kaoz gant Leonard PAUL ha Mathieu ANDRE indianed er C'hebek.  
Mathieu ANDRE ne ouie tamm galleg ebet : PAUL a droe.



Al Lanv : *Deus peseurt kornbro eus Kebek emao'h ? Peseurt meuriad ?*

L. PAUL : Emaomp o vevañ e Biz ar C'hebek. Bez ez eus nav gomuniezh "Montagne". Eus aodoù Nord ar Saint Laurent betek un tamm pelloc'h eget enez Antikosti. BETSIAMITES, SEPT ILES, NATASHKWAN, (Gilles VIGNEAU a zo ginidik ac'halese) MINGAN a zo kampoù indian er C'hebek. A bouez eo laret ez eus a-wechoù kevredigezhioù gwenn o vevañ e-kichen ar c'hamp. E NATASHKWAN ez eo e-giz-se. Saint Augustin a zo ar c'hamp pellañ. Schefferville a zo e kreiz an douaroù, 600 kilometrad eus an aod. Bez ez eus mengleuzioù e-leizh e Schefferville, dalc'het gant ar re wenn eveljust.

Al Lanv : *Pet a dud a gaver etre-tout en nav gamp ?*

L. PAUL : 10 000 den. BETSIAMITES a zo ar c'hamp brasañ, 2 000 montagnae ennañ, ac'halese emao-me.

Al Lanv : *Peseurt ment en deus ur c'hamp ?*

L. PAUL : Dister-tre, just a-walc'h bac'hañ an dud pas muoc'h. BETSIAMITES a zo un tamm brasoc'h : 25 km<sup>2</sup>. Ar visio-nerien eo o deus goulennet e vije savet kampoù evit an Indianed. Morse n'o dije soñjet drezo o-unan goulenn seurt tra. An douar en e bezh a oa dezho. Ne gomprenent ket perak ne vije roet nemet un tamm.

Al Lanv : *Ya, penaos eo bet krouet evit gwir ar c'hampou-se ?*

L. PAUL : Ar c'hampou 'zo bet savet gant gouarnamant ar C'hanada hag ar gouarnamant rannvro evit dirouestlañ kudenn an Indianed. Feurioù-emglev zo bet ur bern. Gwechall e veve greist-holl an Indianed diwar ar beskerez hag ar chase. Evit ober unvaniezh ar stad Kanadian ez eus bet divizet gant ar gouarnamant sevel un hent-houarn hag a greuzfe ar vro eus ar c'hornog d'ar reter. An hent-houarn a zo bet ur bazenn davet an trevadenniñ.

ma vije laosket an Indianed da vont ha da zont hervez o youl. Danvez pinvidik an douar a vennet kacout, an aour, an houarn hag all... ha difennet a-dal ar mare-se d'an Indianed chaseal ha pesketa. Setu istor ar feurioù-emglev. N'eus bet nemet ur feur-emglev sinet er C'hebek, e 1975 e oa, anvet eo bet feur-emglev "Bae James".

D'ar c'houlz-se eo bet mastaret ar vro da vat. Drafod ha sannoù divent zo bet savet war an darn vrasañ eus ar stêrioù evit kaout tredan. E traonienn ar Saint Laurent emañ ar re wenn. E lec'h all n'eus nemet Indianed o vevañ, met pa 'z eus pinvidigezhioù en douar, neuze e vezont gwelet o tont. N'int ket chalet gant an Indianed. Emañ an alouber o tistrujañ ar vro. D'an Indianed KRI ez eus bet roet 225 million a zollaroù evit o douar.

Indianed yaouank dibabet gant ar gouarnamant a zo aet da sinañ ar feur-emglevioù-se. Morse n'eo bet goulennet o ali digant ar re gozh, tud e-giz Mathieu ANDRE, int-i eo koulskoude a zalc'h an hengoun, a oar an doare da chaseal. Ar re yaouank-se ne anavezent netra e skiant an douar. Mathieu a zo ur penn-meuriad doujus ouz an natur. Tamm ha tamm e giz-se ez eo kresket ar wask, ar frammoù evit hon deskadurezh. Klask a ra gouarnamant ar C'hebek kompezañ an traoù ha mirout e vije diforc'hoù etnikel. Setu labour ar vroadelourien gebeket. Ni, n'omp ket Kebekiz ha ne vimp morse. Fellout a ra deomp lavaret hor soñj ha bezañ mestr war hor pinvidigezhioù : ar peskerez, ar chase (karibou) ar c'hoad, ar stêrioù, krouif ur seurt "partnership" gant ar gouarnamant. N'eo ket mat diheñchañ naoz ar stêrioù. Re brim ez a ar gouarnamant e gounidegezh an douar. Kalz re a lennoù, kalz re a zour. Ret eo nac'h seurt distruj.

Al Lanv : *Peseurt kudennoù a zo savet goude seurt distruj ? Roll mergl ar mengleuzioù-houarn da-skouer ?*

M. ANDRE : Distrujet eo bet ar vro e gwirionez. 700 km<sup>2</sup> a zo mastaret e-giz-se gant an dour-beuz kaset gant al labouradegoù tredan oc'h implij nerzh an dour... ar mergl a gaver el lennoù, ar gwez beuzet a vrein war strad al lennoù... an hentoù implijet gant ar c'haribou a vez beuzet...

Al Lanv : *pelec'h ez it da chaseal bremañ ?*

M. ANDRE : Diaes eo chaseal bremañ. Tachadoù 'zo ne chom nemet enezennoù dister. Dav din mont pell-tre ha memes mont dre garr-nij. Kalz arc'hant a zispignan, ha tout an Indianed n'hellont ket hen ober. N'int ket pinvidik a-walc'h.

E 1979 ez eo deuet gwardoù Terre-Neuve betek al lochemn an boa savet eno. Va fuzuilhoù, va zrapoù zo bet skrapet diganin.

L. PAUL : Er C'hebek ez eus un tamm eus "Terre-Neuve". Aze ez eus harzoù, met an Indianed ne asantont ket d'an harzoù-se. Re al Labrador n'o deus morse bet harzoù evit chaseal. Bep sizhun ez eont betek rannvro "Terre-Neuve" da chaseal... M. ANDRE : Rankout a raen mont da glask va fuzuilhoù, met dre ma oa an erc'h o reuzif n'on ket bet. Bez e oa ul lizher war an daol : d'an 10 a viz Even e oa ret din mont da vezañ barnet. An deiziad a cheñche bep miz... N'on ket aet c'hoazh. N'on ket a-du gant o lezenn. "C'hwil 'zo laeron" a lavariz d'ar polls. Ni, an Indianed, a zo bet ar re gentañ o vevañ amañ ; den n'en deus morse paet koumanant ! Heuliañ a ran roudoù ar re gozh : ne beglin ket !

Al Lanv : *Piv a zefenna ac'hanoc'h dirak al lez-varn ?*

M. ANDRE : Dav din kemer un avokad "terneuvat" ha pas kebekan.

L. PAUL : Memes an Indianed a rank paeañ evit pesketa an eged, daoust ma oa ur peskerez hengounel.

Al Lanv : *Gouarnamant ar C'hebek en deus memes emzalc'h ganec'h-c'hwil Indianed hag ar gouarnamant gall ganec'h, e-keñvez ar yezh ivez.*

L. PAUL : Ya, bez ez eus un eurvezh kentelioù bep sizhun en hor yezh...

Al Lanv : *Hag er radio pe en tele ?*

L. PAUL : Netra ebet. Ger ebet. Klasket z'eus bet war aodoù izel an Nord e Mingan hag e Natashwan... Ar c'hampou pellañ o devez o radio dezho. N'eo ket ur radio forban. Aotreet eo gant ar CRTS, ar radio kanadian. Ur bloaz 'zo ez eo krog. Ar radio-se a servij d'an holl chaseourien a vez er vro. Savet eo bet evit kas war-raok ar yezh. Un darn vras eus an dud ne ouzont ket galleg. Ar gouarnamant ne raio netra evit an deskadurezh. Ar arc'hant a vez roet d'an Aferioù Indian a zo un doare da lakaat an Indianed e-

barzh ar sistem. Ni a fell deomp implij an arc'hant-se evidomp, evit hon ezhomm. Fellout a ra deomp bezañ mestr war hon aferioù. Ret e vo d'ar ministr asantif d'ar pezh a fell d'an Indianed. Ret eo deomp cheñch an traoù da vat.

An Indianed n'int ket a-enep ar c'hultur gall pe saoz met pezh a fell dezho eo e vije roet arc'hant dezho evit mirout o sevenadur dezho, da laret eo reiñ deomp peadra da gelenn, da gaout kelennerien montagnae, da sevel ur skol eil-derez er c'hamp. Tout ar skolidi kentañ-derez a zo er c'hamp, ar re a fell dezho d'ar c'hamp gant o studioù ha mont er skolioù eil-derez a rank mont kuit er skolioù gwenn. Evel-just ez eus kudenn ar re ne fell ket dezho mont d'ar skolioù-se, hag ivez penaos e vint degemeret en ur gevredigezh estren.

Al Lanv : N'ho peus ket klasket ober e-giz e bro Euskadi pe e Breiz bremañ, krouñ skolioù hep sikour ar gouarnamant ?

L. PAUL : Krouet 'z eus bet skolioù er c'hampoù er Stadoù-Unanet (anvet int "skolioù ar vuhez") gant ar Siouded da skouer. E-maez ar sistem emañ ar skolioù-se evel-just.

Al Lanv : N'hellit ket hen ober, c'hwi ?

L. PAUL : Fellout a ra deomp da gentañ ez errufe an arc'hant betek ennomp. An Navajos o deus o Skol-Veur dezho, o sistem dezho. Deuet int a-benn da rediañ ar gouarnamant da reiñ an arc'hant o doa goulennet evit o ezhommoù.

Al Lanv : disheñvel eo kudenn ar yezh evidoc'h : komz a rit ho yezh. Met daoust hag e oar tout an dud komz "Montagnae" ?

L. PAUL : Ya, an holl, nemet ur c'hamp montagnae, Pointe Bleue, lec'h ma 'z eus 8% nemetken a oar ar yezh. Bez ez eus darn ne ouezont tamm galleg ebet. Mathieu, emañ, ne oar ger galleg ebet hag an darn vrasañ eus Indianed an "Aod Izel" (la basse côte) ne ouezont nemet o yezh. E-kichen kamp "Pointe Bleue" emañ kêr Roberval hag evel-just e vez bras tre levezon ar re wenn. Kreñv ha garv eo ar stourm, met Ottawa eo a ziviz petra eo an deskadurezh evit an Indianed. Dre vras, e oar an holl Indianed lenn ha skrivañ o yezh ; 10% anezho ne ouzont ket skrivañ.

Al Lanv : Ha kudenn an dilabour e-touez an Indianed ?

L. PAUL : N'eo ket diaes : emañ an Indianed er maez ar gevredigezh hag an armerzh er C'hebek. E-giz ma laren dit, bac'het 'vez an Indianed er c'hampoù.

Al Lanv : Teknokrated indian 'zo, koul-skoude ?

L. PAUL : Bez ez eus, ya, un niver bihan anezho a zo aet d'ar skolioù-meur. Hag int-i, mestroniet ganto skiant ar re wenn, eo a gomz en afiv an Indianed. Lavarout a reont emañ ar gwir ganto, met kement-se n'eo ket anat atav. Gant an deknokrated-se eo bet sinet feur-emglev Bae James. Me gav din e kaver, er vromañ ivez, Bretoned gwerzhed d'ar Stad ! War a seblant, e-touez ar Montagnae d'an nebeutañ, e kendalc'ho ar re yaouank gant stourmoù ar re gozh. Ezhomm 'zo, memestra eus yezh ha doareoù an deknokrated evit dont a-benn eus hor stourm. Met ar stourm pennañ a zo saveteiñ an douar, an natur, ha war ar poent-se emañ ar skiant-prenet gant ar re gozh.



Al Lanv : Perak hoc'h eus anvioù gall ?

L. PAUL : Aes eo da zisplegañ. Un Indian a oa gouest da zispenn roudoù ur mart a voe galvet "WAKSTAN", gwechall, ken tost e oa ouzh al loen. Met ar visionerien deuet d'ar c'hamp a soñjas diouzhtu : anv ul loen eo WAKSTAN ! N'eo ket katolik an dra-se ! Ha cheñchet voe e anv. Evidomp eo reizh-tre kaout anv ul loen, al liamm etrezomp hag an natur eo. Paul, André, anvioù an Ebestel eo a voe roet deomp...

Al Lanv : Morse n'hoc'h eus gouezet pe anv oac'h ?

L. PAUL : Nann, dav vije ober enklaskoù en dielloù, e deizlevr ar misioner. Met, ANDRE emañ, ne vez Mathieu ANDRE nemet evit an Aozadurioù Stad, a-hend all e vez ur chasseur... Ma komfe galleg e vije Mathieu ANDRE, met Montagnae eo, sed eo MISNABIW e anv. E dad-kozh eo en deus roet an anv-se dezhañ, da larout eo "an den tonket d'an traoù divoutin". Setu perak ez eo bet penn-meurid. An holl Indianed o deus anvioù indian, peogwir e renont o buhez dezho ha n'eo ket an hini dibabet evito. An anvioù-se roet gant ar Stad a zo anvioù an drevaden-nourien. Goude bezañ bet laeret an douar diganeomp int deuet a-benn da laerez hon anvioù....

Komzoù dastumet gant Herve KORBEL ha TUDU.



Leonard PAUL (a-bleiz) ha Mathieu ANDRE dirak porzh Douarnenez

Kendalc'h Keltiek 1980

Kendalc'h Keltiek 1980 a vezo graet e Dulenn, eus an 28 a viz Gouere betek an 2 a viz Eost. Lojet e vo an dud e St Patrick's Training College, Drumcondra, hag eno ivez e vo graet ar bodadegoù. Evit en em enskrivañ ha kaout diskleriadurioù, skrivañ da : Loïk CHAPEL, Roc'h ar Bleiz, 29210 - MONTROLEZ

Crash-Course Roazhon

a vo dalc'het eus al Lun 30 a viz Even d'ar Sadorn 5 a viz Gouere 1980 e Skol-Veur al Lizhiri, e Kêryann. Boued ha bod a vo kavet e-kichen, er RU hag e siteoù ar studierien.

9 eurvezh labour a vo bemdez, rannet a vodadoù bihan, labordi yezh, yezhadur, diouzh ezhommoù pep hini a vo... Digor eo d'an holl, deraouidi koulz ha brezhonegerien.

Dindan renerezh Per DENEZ e vo aozet ar c'helenn ha poent bras eo en em enskrivañ da :

Service de la Formation Continue de l'U. H. B

6, Avenue Gaston BERGER  
35043 ROAZHON CEDEX  
Pell. (99) 59. 09. 40

pe (99) 59. 20. 33 post 449

# sonerezh

## big bill broonzy

Ganet eo bet William Lee Conley BROONZY d'an 28 a viz Even 1893 e Scott, Mississippi. Krouadur eo c'hoazh pa ziviz ar familh treuziñ an "Highway 61" evit tizhout an Arkansas ha chom eno da vevañ. E-giz an darn vrasañ eus kanerien blues ar mare e stagas da c'hoari sonerezh war ar benveg en doa savet, ur "fiddle" hervezañ, gant ur voest segalennoù ha tammoù fiseleenn stegnet reut. Pa ne oa ket ampart awalc'h an den evit krouiñ ur gitar pe ur benveg all, e c'hoarie war an tamm koad rizennet a servije da walc'hif an dilhad, ar "wash-board". Gant ar c'hoarierien blues eo e teuas implij ar "bottleneck" (gouzoug ur voutailh sanket war ar biz bihan) da vezañ brudet ; gant Tampa RED, dreist-holl. Evel ar re all, ivez, e teskas BROONZY ar blues hengounel, gant e gentrenn ha tud e ouenn.

E-pad pell ne voe gwelet er sonerezh-se nemet youc'hadenoù ur ouenn tostoc'h ouz al loen eget ouz an den. N'eo ken e-doug ar bloavezhioù 50 e teuas ar blues da vezañ anavezet awalc'h en Europa. Big Bill BROONZY a zo bet unan eus ar re gentañ o tont da ganañ war an dour-bras-mañ. Adalek ar mare-se e voe levezonet un niver mat a ganerien pe a strolladoù pop gant ar blues ; kalz anezho a gavas o awen er blues e dibenn ar bloavezhioù 60, arak dont da vezañ anavezet er bed a-bezh. Menegomp Bob DYLAN, gant *I shall be free ha Fixin' to Die Blues*, levezonet gant LEADBELLY evit an tamm gentañ ha Bukka WHITE evit an eil. (Unan eus ar ganerien blues hengounel ar muiañ doujet e oa LEADBELLY er Stadoù-Unanet. Pa varvas, e 1949, e skrivas Jack KEROUAC ur varzhoneg anvet DEARBELLY). Orin *Confessing the Blues*, kanet gant ar ROLLING STONES a vo kavet e-barzh blues B. B. KING ; Jimmy REED en deus awenet *Big Boss Man* an ANIMALS. Pa selaouer *Blues in the Bottle* gant LOVIN' SPOONFUL e soñjer diouzhtu e Lightnin' HOPKINS. CHNED HEAT ha CREAM o deus graet pep a bladenn gant John Lee HOOKER...

E 1920, avat, e oa dianav Big Bill BROONZY pa zivizas kuitaat an Arkansas evit mont da Southside, karter du Chicago, da vevañ. D'ar c'houlz-se c'hoazh e oa, e spered ar re zu, hanternoz ar Stadoù-Unanet ur baradoz e-keñver ar Su.


Ar re yaouank a skarzhe davet an Nort an abretañ ar gwellañ. Dre vras, e kuitae ar re yaouank ar gêr pa oant etre 17 ha 25 bloaz. BROONZY, en, a oa 27 pa erruas e Chicago. Iskis ar baradoz ! Kuitaat heol ar Su evit kavout ranndioù kozh ha brein, mogedoù lous ar gêr vras, tud dilabour o kestal a-hed ar riblennoù. Kuitaat heol ar Su evit bevañ gant mignoned fealañ ar re baour : ar razhed ! A bep seurt micherioù e kavas da ober : micherour an hent-houarn ha mengleuzier, da skouer. A-gevret gant al labourioù-se e kane BROONZY e-barzh ostalerioù ne oant ket eus ar re zereatañ. Lavarout a rae en doa desket c'hoari ar gitar gant Papa Charlie JACKSON. Kregiñ a reas da enrollañ pladennoù en un doare reoliek e 1930. Diaes e oa d'an arzourien zu ober pladennoù dre ma oant du. An ti gentañ da embann ha da werzhañ pladennoù blues a voe Okeh Records. Embann a rae an dud a vicher pladennoù liesdoare, met aon o doe da ober kement-all gant kanaouennoù ar re zu. Krouiñ a reas koulskoude Okeh ar "Race Records" ("pladennoù ar re zu evit ar re zu"). E 1920 e voe enrollet evit ar wech gentañ ur voriaenz : Mamie SMITH. Kement a bladennoù a voe gwerzhet ken e teuas ar c'hompa-gnunezhioù all d'ober memestra (Arto, Columbia, Victor, Emerson...). Met ar blues gwirion gentañ lakaet war ur bladenn a voe "Down Hearted Blues", kanet gant Bessie SMITH, e 1923.

E 1938 eo e teu BROONZY da vezañ anavezet er Stadoù-Unanet. Er bloavezh-se eo e varvas Leroy CARR (dre forzh kaout sec'het re allies) da 32 bloaz. En hag e gitarer Scrapper BLACKWELL a oa betek neuze ar re vrudetañ. BROONZY a gemeras o lec'h. A drugarez d'e vonedona e etre an Arkansas ha Chicago e oa deut BROONZY a-benn da ganañ ar blues hengounel (Country Blues) ha blues kêr (Urban Blues) gant an hevelep "feeling". E London eo (e 1951) e roas e abaden gentañ en estrenvro : an abaden-se a verkas derou ar "Blues Boom" en Europa. Marv eo Big Bill BROONZY e 1958, debret e skevent gant ar c'hriagn-bev.

### Un nebeut pladennoù

The Young Big Bill Yazoo. L 1011  
Big Bill and Sonny Boy RCA Victor. RD 7685  
Trouble in Mind Fontana. 688 206 2L  
Lonesome Road Blues Vogue. BL 12 501

## GERIOU - KROAZ JOB kael 2



### A-LED

- I - Laboused hor stêrioù.
- II - Pezh a reer ouzh an nor da zont-tre (kemmador).
- III - Brabañserezh.
- IV - Rannig-verb - araogenn - ivez fonetek.
- V - Meur a Lanig.
- VI - Boule'hañ a raint un erv
- VII - Laouenanig Kleder.
- VIII - Strobinellerezed martoloded
- IX - Huður - Z kembraek.
- X - Bas e vez an dour warno.

### A-SERZH


- 1 - Labous-mor hir e veg.
- 2 - Kaset gant ar broud - aour spagnat.
- 3 - An hini a ra ar vestl - rannig hetif - eus ourguilh.
- 4 - Alc'houedered.
- 5 - Pa denner an hini diwezhañ eo erru ar fin - bepred e Kerne.
- 6 - Muzul pouez - riñs a-dreuz.
- 7 - Eus sutell - nec'het krenn.
- 8 - Penn a-dreñv hini ar marc'h - diwarnañ e vezer broudet da grouiñ.
- 9 - Puilh er gwrac'hed - gwellañ ha gwashañ tra a zo, a-dre...
- 10 - Penn-bronn war an tu gin - vleuniou a oa arouez Brei... Izel ar Botrel.



## skol ober

PLUFUR  
22 310 PLISTIN

### kael 1



N'eo ket a-ratozh-kaer ma oa bet disoñjet termenadurioù 'zo, reoù al linennoù I ha J dreist-holl, er gael gentañ. Un doare da ziaasaat ar gerioù-kroaz e vije bet, met ne oa ket en hor soñj hen ober hag e pedomp al lemmerien d'hon digareziñ evit ar mank-se.

OFERN ZU  
e Plomanac'h



YA..YA!..  
E-GIZ KUSTUM  
GANT AL LOA-BOD!



dihunet ar  
prefed: ar plan  
polmar a c'hell  
kregiñ

Tudu

SINGING IN THE RAIN  
I'M HAPPY AGAIN!



"MAREE ANNEXE" dirak  
PALEZ JISCARD

